

# DAMON HA HERIET

## Chanson moral

Voar ton : *Ton humeur est, Catherine...*

Tud yaouank, tener a galon  
 Me propos d'ech vit model  
 Daou den, Heriet ha Damon,  
 Da veza fur ha fidel ;  
 Gar ho zourmanchou in trec'het.  
 Dre o vertu, ho c'houraj ;  
 Erân, da veza unisset.  
 A deus bet an avantaj.

Heriet, sûr, a disquenne  
 Deus eur baron renommet ;  
 Ha Damon, oa, deus eul ligne  
 Ive ancien meurbet ;  
 Ar plac'h oa yaouanc ha caer,  
 Ar potr a oa evel moulet ;  
 Mo daou oant eur maezour scler  
 Deus ar gant amourouset.

O trista separation  
 Vit amouroujen tener  
 Tourmentet bras eo ho c'halon  
 En pep lec'h en pep amzer ;  
 Caer a neus Damon hale  
 Varlec'h he zouc Heriet.  
 En nep leçon na oa doare  
 D'ar plac' lech ma zec'uzet.

Mez ar vam superior  
 A dalc'h d'he distrei a grenn ;  
 Parlant a re dezín hep cess,  
 Deus an habit, a regien ;  
 « Quemerit ar voil promplant,  
 Ornit he pisaj ganti ;  
 An diez dreist ar firmamant  
 Neuse euzo euzo meulod

— Ma zad, petra c'hoare  
 Ma zec'h quoment chagrinet ?  
 — Da vreur na man quen en bue  
 O combat ti eo lazet ;  
 En Allemagn o rei zouten  
 D'ar roue-leun a gouraj ;  
 Ha d'am e'honsoli, na chem den  
 Nemet ta... pas d'avantaj.

— Er moment ma, ma zadic quoz,  
 Me ho ped da arretin  
 An objet deus ma c'harantez  
 Breman ma accorfet din,  
 — He yuez, abaoue pell amzer  
 Ma m'erc'h a neuvez collet  
 En Itali, a leverer,  
 Er plac' Castella hanvet.

A denerediguez carguet  
Damon eur zul, d'ar mintin,  
Gouze beza devot clevet  
Oferen eur c'hapucin,  
A n'emp rent en ty ar baron,  
Poli bras, lenn a douster,  
A lavar : « Me a zo Damon »  
Ma recevit vit map caër.

— Evidoc'h den braou ha galant,  
Ma merc'h na vo birviken ;  
Dreg eur c'hrill an Oll buissant  
A vo he fried hepquen.  
Ma meubl a priciussa,  
Hac aour bars an abondans !  
N'ho possedo den er bed-ma  
Met ma map en assurans.

— Ah ! miret ho pinvidiguez  
Hac ouспен ho tensoriou,  
Na breiantant cavet james  
Hep lod aneze auro :  
Ma peus aour, me meus ive  
Suffis, herve ma souhet :  
Euc ho traou holl na fell din-mo,  
Met possedi Heriet.

Ar baron coz hac impoli  
A dec'h 'neur c'hija he benn,  
Hanval euz eun tad meurbot cri  
A tro prest deza he quein :  
Hac en no harlec'h a treinas  
D'eur gouënt pel ac'hane  
Ar plac'h nep cavet fot biscoas  
Nemet he fidelite.

— Ah ! Itron superiores,  
Destumet ho badanaou  
N'allant quet dre zeimpladurez  
Couesan dindan ho langou :  
Da eur chans mujoc'h evurus  
Doue a neus ma galvet,  
Da Damon, mignon vertuzuz,  
Me vezo fidel bepret.

Deus an Allemagn ec'h erru  
Gant ar baron eur lizer ?  
Kvit annous deza, dious-tu,  
A zo maro e vap quer,  
Pehini, evit quir oa bet  
Courajus bras er gombat :  
Mes er fin oa bet discret,  
Hug a rencas seuil e voad.

Ar baron pa lenn al lizer,  
Ne cess da houclan ;  
D'he val a seuil daero tener  
Balancour d'he varo cri.  
« Me a moa miret emeza,  
Evidout cals a vadou :  
Heriet zo venget brema,  
Dre buissans an Envou. »

An deiz varlec'h a partias  
Vit goulet d'ar graent.  
« Ma merc'h me meus disesper bras  
Me fell din coll ma squient !  
Doue a deu d'am punissa  
Deus ma re a gruelde :  
Evidout elec'h coll brema  
Vo ma mret'h muia caret. »

O chans leun deus a gruelda !  
Ah ! ma mignon zo maro,  
He vuez a zo tremenet,  
Me neus quet fin d'am deizo !  
Destinadurez rigourus,  
Har c'hos tad cri ha barbar,  
Ho calon neubeut truezus  
Evit biquen ho separ.

Adieu ! ma zad paour eta,  
Adieu ma mignonset,  
Me finisso er gouent ma.  
Ma devejo da donnet  
Oll blavejo trist ma bue,  
Dindan habit eur seurez.  
Vo laquet do bedi Doue  
Da bardonni d'am zad quez.

Ah ! Itron superiores,  
Eun habit promp me ho ped,  
Rac eun desir zantel am press  
Da veran deuz ho denved :  
Troc'hit buan ma bleo melen,  
Pere moa quement soignet,  
Hep conservi eur seoum hepquem ;  
Ma c'harantez zo collet.

Adieu-ta ma muia caret !  
Evit ar vec'h divézan,  
Pa sonjan enuod, ven maufret  
Da boan zo collet breman :  
Adieu eta ma c'halonnie,  
Hanval ouz an durzuc'h,  
Goude ma vezin maro aie,  
Me vezo c'hoas di fidel.

Heriet eta zo novij :  
Domaj bras e-zeo mearbet ;  
Penos ve dindar eu silij  
Coachet quement a c'henet,  
He zad a nevous bolonte  
D'he lemel deus ar gouent,  
Mez maro eo e c'harante :  
Eun ze birviquen na zent.

Mez eun de hepquen justamant,  
Aroc e profession,  
Quasi dre eur barzud patant,  
Clevit gant attention :  
Ebars en pep lec'h na gomzer  
Met deus eur e'naptif prenet,  
A galite yaouanc ha caer  
Deus an Turki retornet.

En pevar c'horn quar na glever  
Comz met deus an esclav coant ;  
An oll a den d'he diguemer,  
Ha gante peb a bresant ;  
Ha memeus an itronezet.  
Meurbet tener dre natur  
A seuil daero pa deuz clevet  
Rapportu he avantur :

Bete ar superiores  
A neus desir d'hen guelet ;  
En eur momet pep leance  
D'ar parlouer a direde,  
Pervuia chome Heriet  
Ebarz eur gamb a goste,  
Mez dre eur monamant secret,  
Hi zo n'em rentetive.

« Captif brao contet-hu din-me.  
Eme ar vam leancez,  
Petra den d'oc'h accabli,  
Rac me meus ouzoc'h truez.  
— M'ho ped aron, ma exusez

A greis ma c'halon me garie,  
Eur plac'h yaouanc a wravoan ;  
Hi he unau, deus he c'hoste,  
Am c'here sur a gredan ;  
Drouc contant eo e zad cruel ;  
Coilet neus ma c'harante :  
Anlevet neus ma douz fidel.  
Eun devez deus ar beurre.

En pez anderet a zeo coachet,  
Leverit tad rigorous  
Epad seiz vicia meus-hi clasquet  
En mui plas danjorus ;  
Partout na ran nemet bale ;  
Clasq a ran hep esperans  
Ar feumeulen die eun de  
Laquat fin d'am oll souffrans.

Eur c'horser coz am quemeraz  
Hac am guerzas hep true ;  
Ma c'halon sincer a chomas  
Ha fidel en amitie  
Beza neva eur plac'h charmant  
Hac an c'hoantas da bried ;  
Mez elec'h bezan inconstant.  
Cals a boan a meus souffret.

D'ar fin homman ze bet fachel,  
Pa deuan d'he refasi :  
En taont d'eur blavez es bet  
Crean ous ma fersecuti :  
Dre heurz on bet obliget  
D'al labouriou rustan :  
Me n'em gaf meurbet affliget  
O prouons a gairiou-ma.

Ma bue oa echu quasi,  
Me a desire mervel  
Pa n'em gavas bars an Turki  
Nombre deus ar venech'stancel :

Danve al leanez yaouanc  
Dre an discours-se troublet  
A renq caret sicour hep manq,  
Digant an oll saurezat.  
Gant eul lagat a ra eur seil.  
Lavaret a ra n'eur greua :  
« O Damon, ma mignon fidel  
Te vel da vestrez brema. »

Damon o clevet e c'homme  
A goll a reson quereant :  
Mar he lozet ar grill a forço,  
Devi a rei ar gouent.  
Ha 'vit gallout he arreti,  
Eo ret prometti deza  
Penos a deui da cureugi  
He zouçik Herrietta.


Ar baron coz a druas  
Evit ar brofeçion :  
An amitie ze an corgas  
Deuz a compassion.  
Racal a deu da consenti  
D'eun heveliep allians,  
Ha hep eur somet deporti  
A curun nos esperans

An dimizi ze a ve gret  
Gant cals a solennite.  
Ar guerent yaouanc pe oajet  
A oe assemblet neuze,  
Goude quement deus a boaniou  
A groas hac nec'hamant,  
Oe unisset ho c'halounou.  
Da recompans ho zourmant.

...qua quec...  
A ve ma c'hano discleriet;  
M'e zo digentil yaouanc.

Gant Doue qui digasset.  
Mez sort na gouant ma peziou,  
Mar n'am bequet Heriet.

Propriete  

Brest Imp. Le Bossu & Co. et Guéhen